


PAOTRED BREIZ-IZEL

MODERATO



En Breiz 'barz ar c'hoa-



jou Me glev al la - bou - sed O




ka nan braz - de - riou ma



bro mui - an ka - ret.

DISKAN




Pao-tred Breiz I - zel, Ka-nomp a wir-ga-



lon, Ka - nomp meu - leu - di



bre - man d'hon bro vre - ton.



Pao-tred Breiz I - zel, Ka nomp a wir ga-



Ion. Ka - nomp meu leu - di



bre-man d'hon bro vre - ton !

En Breiz, 'barz ar c'hoajou
Me 'glev al laboused
O kanan brasderiou
Ma Bro muian-karet.

DISKAN :

Paotred Breiz-Izel, kanomp a wir galon
Kanomp meuleudi breman d'hon Bro
vreton. (Diou wech).

Klevit ar plac'h vihan :
'N eur vesa he denved,
En brezoneg e kan
Hon zoniou ken karet.

Prinz, kont, duk ha markiz,
Baron ha paizant,
Komzomp yez koz Breiziz ;
Kanomp hon toniou koant.

C'houi, martoloded kêz,
Pere a red ar mor,
N'ho pezet ket a vez
O komz en yez Arvor.

P. JOUAN (Stereden Breiz-Izel).
